

## DISCOURS

*Evit goulenn ur plac'h da zemezi mar be ar banget elec'h  
ma nedi ar Plac'h, ha mar be goulenet goude dijuni.*

G. **A**bars ho quittat, Compaguunes,

Dh'or beza recevet en ho ti,  
Ha roet decomp da zizuni,  
E tiscleryan e zon cuguet  
Da bresauti deoc'h ur rejet.  
Laqet ouu e penz ar vanden,  
Hac eus c'hoant e parlantsen :  
Avoni a ran gouscoude  
Ouu indign eus an henor-ze,  
Dre n'am eus qet a dalant,  
Disadurez na calz s'quiant.  
Ar pez a zeu d'am bardissat,  
Eo ma credan oc'h tud vad,  
E viot prezt d'am excusi

15

E-eus ma rascen fasi,  
En despet d'am intencion,  
D'ober mad va c'hommission,  
Rac-se, mar permettit din,  
Digompliant ec'h exposin.

R. Disqueus a rit nil act a humilité  
Ila qement a civilite,  
Ma veritit sur gant rezon,  
E resmp deoc'h hon attaucion,  
Piividig ha den honest,  
Beza savant ha modest,  
Zo galiteou ar re gaera,  
Mes nonpas ar re gominina,  
Ha gouzant trugarecat  
Evit ar zervichou mad,  
N'eo qet certen an hent fall,  
Evit olten c'hoas re-all.

Parlantit eta hardimant,  
Hac exposit ho santimant,  
Ha diouz ma zeo ho commission,  
Ni a vo prest da entent rezon ;  
Mes manfig e ve parlantet,  
Hac e ve hor pennou golect.

G. Bez em eus hirio an henor  
Da bresanti dirac ho tor  
Un den yaouang leun a furnez,  
Hac eus oe'h anaoudeguez ;  
Ur merq bras eus e s'quiant,  
Eo m'en deus preferablament  
Choazet unan eus ho merc'het  
Evit beza e bried.  
Gouzout a rit eo dija  
Publiet teir guech ar bromessa,  
Ha n'on eus den clevet parlant  
Auep seurt ampechamant,

14

Nac e vet en em opposet  
Da retardi an eured ;  
Kac-se oump deut d'he ledi  
Da zont hirio da geatracti.

R. Me a zistro eus a gampagn  
Pienz costez an Alaingn,  
Hac eus deg mis n'on qet het  
Dre anan en olerem-bret ;  
Kac-se oe'h afer demezi,  
A so din-nse nevesenti.  
Alcone dech' e mon o redet  
Evit guilet va mignonet,  
Hac e sonjen voa evidon-me  
Edo anan an assamble ;  
Hac voa preparet ur banget  
Gant ar joa ma voan distroet.

G. Atao dious costez ar yaouez  
E ve clasqet cant digarez,  
Ha na ousac'h qet evit petra,  
Nemet evit delcher an dud en o za.

H. Ne glasq' qet digareou,  
Mes exposi va rezonou ;  
Gortos a renqit, rac ar mab eus an ti  
En deus goal faouet e fri,  
Nonpas euz en em gannu,  
Mes o fourra butuu eun'i,  
Hac eo velet d'ar mare'lhad,  
Dz glasq' un ados d'e chriad.  
Mes da c'hortos ma teuy d'ar gear,  
Rac ne zoleo qet sevar,  
Tin dous va daic'hie nec aman,  
Evit respouat evitan ;  
Rac-n'e tiscleryan deoc'h,  
Entedil mad, mar plichi ganeoc'h,  
Ist e ve pare mad e fi

15

Abars caç ar plac'h da cureiji,  
En aon na ve ar bleg spontet  
O velet ur fri querfaoutet.

G. M'en devije lavaret din me,  
E voi bet quit d'a vont qeit-se :  
Ia, rac me yoar parea  
Gant remejou ar re zrola.  
Aa deiz all va march du,  
Eur march mat, e creis e fru  
A oe roquet e groc'hen  
Gant un toll dant digant un azen :  
No pije bioken devinet  
Gant petra emeus e baret ?  
Gant un tam qic-sal d'e bensellad,  
Hac ua anduillen d'e chriad.

R. Credit din, o redet bro  
E tisquer traou neve ato,  
Pa oan e Spagn en arme,  
Un devez ma oa calz arne,  
Abars an éost en nevez anizer,  
L'el éruas eur goall afer.  
Ur vreg gant un aer o vea flemmet,  
Tout he zud a oa nec'hiet ;  
Fasil e sonjiet ar chreg a varvas ?  
Kau : an aer è a grevas.

G. Me n'oun qet eus an dud habila,  
Mes adres am eus da scriva ;  
Qenta lizer a ris hiscoas,  
On scrivet gant un aval poas,  
Ha goude va guella pluen  
A so bet un anduillen,  
Credabl è e scrivan mat,  
Da viana scritur anat ;  
Hac gant qementse tout,  
Me auueus grët calz a rout :

16

Ha pa bresantan ur reget,  
E vezan diouc'h-tu selaouet;  
Ha ne bretantùn qet bréma;  
Beza dale'het reir ama.  
G. Me meus aon na vec'h gasconet  
Tud custum da redet,  
Gant ho fri ato en ar,  
Nonpas evit attrap flér,  
Mes evit santout c'hoes vad  
Dre b'ini e ve amat  
E pelec'h eus question frico,  
Evit en em renta eno,  
Hac e clasqont mil digare,  
Da gaou lod eus ar molarje.

G. Choui a so saint mintin  
Da laqat an dud da c'hoarzin ;  
Mes an amizer a ya en dro,  
Rac-se astompi aso.  
Ia ; ur gascon en deiz all  
A ras un dro n'oa qet fall ;  
Rac evel m'en devoa clévet  
Oa question eus un eured  
Gant famillou a conseigans ,  
Tud pividic hac a brestans ,  
Just deis ar veladen ,  
E leqas en e ben  
E vije manifiq deza  
Mont di ivc da leina.  
Evel m'en devoa calz a speret ,  
Ne voe qet pel-ambassaset  
Evit caout un digare  
Da gomz ouz tad ar plach' rève.  
Ar gompagunez a voo érruet ,  
Ha den mui na c'hortoet.  
Neuse ec'h antreas ar gascon ,

18

Ar pez so aruet ganéc'h :  
Abone dec'h ho plach' yaouang  
E deus chenchet a santimant.  
Me a oa ét eus ar yro .  
Hac e sonjet e oam maro :  
Mes evel ma oon en em gavet ,  
E deus dîmme dîguemeapnet  
N'eu hoa nemet en em avane ,  
Hac em hije ar b'iferañc.  
Quer huan diouc'h-tu , c'h retardi ,  
Oun diredet d'ha saundi ,  
Hac e ria hirio gueladen ,  
Cetu aze un obaden.

H. Ia , va c'homiper , obaden a ve ,  
Ma ho pe grét ar seurt tro-ze ;  
Hac ahars fin an obaden ,  
Ec'h astenfet hir ho mourien :  
Rac ni ranço guelet  
Var betra oc'h en em fountet.

G. Me am eus clévet dija  
Meur a guilloq o cana ,  
Hac evit ne doun qet c'hoas cos ,  
Em meus guelet mcur a vleis en nos .

H. Laquit eves : eus ho parlant ,  
Ne vec'h vel er zondard vaillant ,  
A so prest da g'rever tout ,  
Hac a den gant e za'h gollo en e ront.

G. Salocns , e guirionez ,  
N'eo qet me eo hennuz .  
Me a so het ercis an tennou ,  
Ha pa veka ar voulzjou  
A lance an enemiet ,  
Pell dious crêna na tec'het ,  
Me a luqe anezo .  
Da deuleur adare outo :

17

Gant reverançou a fécon  
Anfin , squis o saludi  
E lavaras da vestr an ti :  
Me meus evidoc'h un afer pressant ,  
A hel talont déc'h cals arc'hant ;  
Fachet oun d'oc'h interrompi ,  
Mes ne qet un dra da ziferi.  
Ar mestr a lavaras d'ar gascon :  
Chomit da leina , va mignon ,  
Ila goudé-se var hon abaster ,  
Ec'h ententimp ous an afer.  
Pa vee gret ar regal tout ,  
Ila deut ar poent da vont er ront ,  
Ar gascon neuse a lavaras :  
Setu ama an afer bras.  
Gant ho merc'h e meus clévet  
E prometit rei cant mil scoet ;  
Mes , mar qirit , me e c'hemero  
Gant an anter eus anezo ;  
An anter all o chom-ganec'h ,  
Setu eur gonit caer déc'h.  
An tad ne gavas qet dereat  
Beza evel so goapeat  
Credabl è en eui fachas ;  
Mes ar gascon a hartias :  
Buan e rangas trei e guecin ,  
Mes attrapet en doa'e lein.

H. Ni nomp qet gasconet ,  
Mes tud sincer , guir Vretonet ;  
N'eo qet leinou eo a glasqomp ,  
Mes ar Plach' nève a c'houlenmomp ,  
G. Me gred oc'h on den ar guella ,  
Ha ne ve qet mad ho trompla ;  
E ve pec'het oc'h anusi ,  
Ha menes ho retardi ;

19

Setu penos emeus an honor  
Da zistrei ama gant ar victor ,  
Hac hirio e contan ive  
Em ho ar victor adare .  
H. Un den terrubl oc'h , var ho meno ;  
Mes piou a sonj déc'h ho credo ?  
Ti a our o redet hrôyou  
En em zainer a varvaillou ,  
Hac e râr coll cals a amier  
O conta ur bern gueyer .  
Choant oc'h eus-u d'hor sponta  
Hac d'or c'hass quit eb netra ?  
Ni nomp qet prest da cedi ,  
Hac e ve red procedi .

G. Allas ! evit gapt procesou  
Ne avancimp qet hor fortuniou :  
Dout a ra bremâ em speret  
Un histoir ameus het clévet :  
Penaos daou zen o pourmen  
A rancontras un histren :  
Setu chican etreso .  
Da c'houzout da biou e yezo ,  
Car pepini a brétañt .  
E oa déan an tenzor-se .  
Mont a rejont e proces ;  
Mes souden o deoû mez ,  
Rac ar barner , eb c'âlz pledi ,  
A gavas moyen do unani :  
An histren a zigoras ,  
Ar pez a oa enni a dennas ,  
Ha goudé debri an histren ,  
E roas dê peb a groguen .

H. Gouzout a rân , couls a choui ,  
Ne dleer jamez cals procesi ,  
Ha penos ar procesou

20

A revin cals a familiou ;  
Mes an oll a oar ervad  
Ne qet me a glasq chicanat :  
Hon assen ni so comiancet ,  
Hac a dle heza finisset :  
Pe mar fell déch' resista ,  
Bezit sur e rancot pêa.

G. Léomp eta ar procesou ,  
Hac en em ententou hon daou .  
Mar cedit ar plac'b-in a gane  
Me gavo un all d'ho toare ;  
Unan hac a oar menaji ;  
Ha mont a ran déch' d'e brouvi.  
An deis all e oan o chasseal ,  
E yis en ti en cur basseal ,  
Hac e doa uset eur c'houlaouen ,  
Evit clasq eur gos spilien .  
Admirit eta peches greg ,  
Uza ur c'houlaouen a venuec  
Evit ur spilien dic'horset ,  
Ha c'hoas ne oe qet bet cayet ?

R. Mar doc'h bas-valan , comxit ouz onnes  
Da varc'hadour an alumettes ;  
Pe otrament , mar plij doc'h ,  
Goulenpit-y evidoc'h ;  
Hor plac'h-ni so en ti-ma  
Roet e deus demp he fromessa  
Gant consantamant he zud ;  
Clévit gante , nint qet mud .

G. Schlantout a ra pus ho clévet ,  
E ve au assen decideit :  
Ha mar d'ê guir qement-se ;  
Ne qet me mui a rei dale .  
Permetit din un neheudic  
Ma rin brâma ur hâteic ,

21

Da c'houzout hac én so en ti  
Eur plac'h contant da zemezi .

*En ur bresanti ur Plac'h Yaouang;*  
Sellit amân , va mignon ;  
Homân so ur plac'h a fècon :  
Mar d'eo contant ha d'ho toare ,  
Lezit grêt eta cyclec .

*Compliment da ur Plac'h Yaouang;*  
G. Bonjour deoc'h-n , Plac'h coant ;  
Fleuren fresq , boget charmant :  
Certeunamant n'eo qet c'houi  
A dle chom hep caout parti .  
Plijet , goude ho coulemenou ,  
E ve cacet hoc'h embannou .  
Hirio n'ellomp qet dale ;  
Ur vech all a so adare .  
Ma noc'h qet erfat contantet  
Gant an objet so presantet ,  
E zan c'hoas d'ober ur hale ,  
Da glasq unan vo d'ho toare .

R. Holla ! ni nomp qet tud fall  
Da guemeret tra un all ;  
Ar vreg-se so perç'hennet ,  
Nemet bez e ve divorcez ;  
Eus ar s'gurt-se mallig hini  
Ne deuy ac'han ganeomp-ni .

*Da uq Intanvez.*

G. Arca eta , Plac'h yaouang ,  
Petra eo ho santimant ,  
Pa velit ar re o deus bet  
Prest adare da gaout fred ?  
Ma na garit hasta afo ,  
E moc'h e risq da goll'ho tro .  
Va excusit , maoues vad ;

22

Permetet eo badinat :  
N'eo qet éruet c'hoas  
An hini a dle ho choas .

R. Mar guelit begou he boutou ,  
E velot souden be scuillou :  
Me gred oc'h den habil ,  
Mes diana oc'h difficil .

G. Non eus tam c'het disprijet  
An objet a so presantet ;  
Hac evel neus eos voutes  
Ha gaver'dezai pares ,  
Onnes iye , aboues guedal ,  
Me gred a gavo nr chanç al .  
Ne nomp qet deut eviti ,  
Ha ne soujomp qet enni ;  
Mes evit an luni so embanuet ,  
..... é banvet ;  
Hac evit le designa mad ,  
..... é he zed .  
Ne glasquit qet digarei ,  
Assur cina en ho ti .

R. Scîr é , pa expliqit  
Eus a binî e parlant ;  
Mes ret eo goulen outi  
▲ contant eo da zemezi .

*Mont u ra da obersur vale.*

Quz an dol emeus-i c'het ,  
Tranquillament bras azet  
Hac e deus lavaret diu-me  
Né ypar qet piou a so zze .  
G. O ! va mignon , ar respont-se  
A so tout-fêt d'hou doage :  
Disques a ra e zé prudant  
Ba mestres l'he santimant .

Evel pa lavarle c'hoas  
Ne rose qet he doru da bep goas ;  
Mes epqen d'an ini  
A so destinet dezi :  
Ennes è just a so ana .  
Ne broposan nemeta ;  
Rac-se eta , grit demp antren ,  
Coulz bac an oll eus va binden .

R. O ! va mignon , c'houi oc'h eus talant !  
Da dreï an traou d'ho santimant !  
Mes gouzout a rit au habila  
A el ive fasia ;  
Rac se , bremâ permetit  
Ma leverin en em dromplit .  
Mar dê ar plac'h-se azet ,  
E zeo occupet le speret ;  
Ha pa he deus roet ar respont-se ,  
Ouz'traou all è sur e sonje .  
Rac amû e zeus'en em gavet  
Alicis a dud d'on guelet ;  
Joa vrás hon eus outo .  
Gant qement-se , evel ato ,  
Eo en em gavet zer just ha tra  
Da veza prim e zara .  
Dre chanç gouscoude déch' oa deut  
Ar meliaz laer gant ar bleud ;  
Hirio eta me ranq poazat ,  
Hac ar plac'h-se ribotat ,  
Hac ouspen qementse c'hoas ;  
Dey eo da rola an toas .  
Rac-se n'och' eus qet à voyeu  
Da gaout hirio hon femelen .  
G. Ma neus qen ouz ho tiésa  
Nemet primeri a vara ,  
Deupt gavén-zie tout a vanden ;

24

Da gundai ar femeleñ :  
 Ni hon eus ur zal vras préparet ;  
 Tapisset ha Beurachet.  
 Poaset bara , qig ha stripou ,  
 Paste , fars-forn ha scotennou :  
 Un dol hir a so savet  
 Evit ober ur banquet :  
 Na c'hedomp nemet ar plac'h néve  
 Evit festa molarje .  
 Pa vesò deut ni a rai frico ,  
 Ni a gano hac a youo .  
 Achanta ta , va mignou ,  
 Petra a lavar ho calon ?

R. Qement a rit o pledi ,  
 Em be c'hoant d'ho contanti ;  
 Gouscoude e ven dirézon  
 Lezel ya stal en abandon ,  
 Car certen eo evit merc'hét  
 Ne qet ès din da zivocret ,  
 Ispicial an ini  
 A fel deoc'h da regeti ;  
 Mes c'houi a so grët ho labour ,  
 Ha noc'h eus ezom a zicour  
 Nemet da gana ha da youal ,  
 Da Iricota ha da zancal .  
 Setu aman ur pot boujant ,  
 Hac a dalo déch' qeit ha cant .

G. Bo ! ne qet da glasq ar seurt-se  
 On-me sur lajet da vale ;  
 Têch alesse , cos marinous ,  
 Ni-ne glasqomp qet ur mous .

R. Ma cavit ennes re'dister  
 Evit ober o'ch' affer ,  
 Cetu aman c'hoas un all ,  
 Ilac evit ur quel n'co qet fall ;

25

In da , cetu un all ,  
 Ha mar quel scler n'en-deo qet dall .  
 G. Bonjour , va den mad ,  
 N'och' eus nemet tostät .  
 Me gred eo dre guriuite  
 O'ch' en em bresantel aze ,  
 Evit quellet hor plac'h coant ,  
 Evit choaz ho santimait ;  
 Mes hon affer-ni so da guenta ,  
 Hac e fell deomp he finissa .  
 Mar teut aman d'en dalé ,  
 D'ho tro ni ray deoc'h hale :  
 Ni ho pao herves ar c'his ,  
 Gant ar nemes monis .

R. Layarit din me , me ho ped ,  
 Ha merc'het ho pro so décedet ,  
 Ma renqit dont , qeit-mâ  
 Da glasq merc'het da fortunia ?  
 Me gleo lavaret e Breis  
 E zeus merc'het aleis ;  
 Ma rafach' ur bournamenen  
 Ec'h alfac'h guelet meur a vanden ,  
 Ha anarzeze , abars fin-ho tro ,  
 Ho pe ar choaz anezo ;  
 Evit aman n'e deus nicun  
 Contant d'ober lie fortun .

G. Lavarit din-me da guenta ,  
 Petra zinifi promessa ?  
 Me meus clévet e peh anizer .  
 E tleer deleher mad d'ar guer .  
 Or , unan eus ho merc'het  
 He deus d'an den-mân prometet  
 Feiz vad ha fidelite :  
 Ni so deut da glasq an drase .

R. Penos eta , me am boà credet

26

E voach'h-u un den , a speret :  
 Guir eo ar seurt-se avichotti  
 O deyeus' i've ureon .  
 Quamdoque bonus  
 Dormital humerus .  
 Ha credabl eo e ve en ti  
 Ur plac'h contant da zemezi ,  
 Hac e ve êt qeit-se ar brud ,  
 Hep ma oufe netra ha zud !

G. Pa ho clévan ho parlant ,  
 Me vel o'ch' eus calz a dalant ,  
 Teod mad ha descaduiez ,  
 Mil insign ha mil adres ;  
 Ec'h ouzoch' forji gueyer  
 Evit trémén an anzer ,  
 Hac e fel deoc'h , gant ho latlu .  
 Hon amusi-ni da c'hoärzin ;  
 Mes , hac e vech' avocat ,  
 Pa noc'h eus qet ar gos vad ,  
 Me a esper ho fëza ,  
 Hac a c'hoarzo da ziveza .  
 Ridebit benè  
 Qui ridebit in fine .

R. Credabl eo eun be mez ,  
 Ma ranscen coll-va froces ;  
 Mes abars ma refot din-me plega ;  
 E squizot c'hoas en hò sa .  
 Selaouit mat , va c'homper ,  
 Pe'ch'et eo coll an amzer ;  
 Eur poent a zo da hep tra ,  
 Ha bremia eo poent finissa .  
 Diou vech emens goulenuet  
 Ac'hann ar plac'h a cured ;  
 C'hoas daou c'her all diou vech anter ,  
 Uc'idomp buuu an affer .

27

Eur vech , diou vech , teir guecin :  
 Setu me bremia direbichi .  
 Roit din bremia ar plac'h ,  
 Pe e zàn quit gent ar zac'h :  
 Ar bauget a so préparet ,  
 Ha bezit sur e vo débret ;  
 Goudese ni a velo  
 Pe choni je ue a bacu .

G. Ous ho clévet-u , mestr parlante ,  
 E rafach' prest un tasqigner ;  
 Mes mar distroit adare ,  
 Ne vo ato nemet dale ;  
 Rac-se , evit miret ous tamal ,  
 E zàn aman d'en em sonjal .

Ar pez a ra din differt ,  
 Eo an ezoq' éus anzer ;  
 Car outspen ma zed ur plac'h coant ,  
 Leun a furnes hac a sqiant ,  
 Eo dilijant en he labour ,  
 E peh affer prest d'am zicour .  
 Mes mar o'ch' eus-hi decevet ,  
 Ha dija en em brometet ,  
 Allas ! he c'halon ja ve eno  
 Hac aman enep he menos .  
 Chouï c'hoas am gourdrous a broces ;  
 Peseurt euden e ve honnés !  
 Mont e proces a so ès ,  
 Mes n'co qet facil dont ermès .  
 Ma c'harusc ganén coll ,  
 Setu me souden fars an oll .  
 Coll va zud ha va danves ,  
 Crevi a rasen gant ar ves .  
 Cuir eo me a ell pretanti  
 Oc'h-u deut d'am attaqi ;  
 Oc'h eus ampech et va foasade ,

28

Ha dalect va ribotaden,  
Mes ne garān qet ar chicanot,  
Ha nebeutoc'h c'houz ar misou.  
Alou, dont a va em memor  
Oc'h eus grēt din au heur  
D'an pedi du vont d'ar banquet,  
Hac oc'h eus memes pedet  
Qement s' em c'hompanuez  
Da vont ive assaunkles.  
Eli bien, eno en ur banne guin  
Ne a veuso tout va chagrin,  
Hac a lavarlo coulz hac un all:  
An affer ma ne deu qet fall;  
Rac-se, evit en em accordi,  
Pa viot prest, deut en ti.

*Complimant d'ar Vreg-Yaouang.*

G. Debonjour deoc'h, Plac'h nevez;  
Me o'salud gant levez.  
Ne qet va c'hondition  
Dont amān dée'h da sermoh:  
Lezer a dicer qementse  
Gant an neb'o deus otorite.  
Mar plich ganéch dont d'an illis,  
Eno ar béleg, erves é ofis,  
A explicò deoc'h, santeles  
Sacramant ar Briedelez,  
Hac'an obligationou  
A gontract ar priejou.  
Ne a mens grēt va c'hommission,  
Chanc vad deoc'h hac union.

*Complimant d'an Ozac'h-Yaouang.*

Chouï ive, va den prudant,  
A verit ur c'homplimant;  
Mes qen neubeut ha va c'homppagnon,

29

Ion qet approuvet evit sermoh.  
Me souet deoc'h digant Douc  
Peb chanc vad ha prosperite.  
Setu dirazoc'h an objet  
Goulenet hac accordet:  
Mar d'on bet onz ho retardi,  
Na gavit qet dies va excusi;  
Gouzout a rit an usach commun,  
Pa ves question eus a fortun.  
Kremān, mar doc'h prest, astit a fo,  
Ne qet me mui o taleo,  
Kemet ma rofot peb a vanne  
D'am c'hamarad coulz ha din-ne.